

Ur c'hlavier C'HWERTY evit ar vrezhonegerien hañ al liesyezherien.



1. Kinnigadur ar c'hlavier C'HWERTY.

Adalek bremañ e c'heller prenañ ur c'hlavier urzhiataer C'HWERTY.

Ijinet evit dic'hoantañ ezhommoù hewelusoc'h-hewelusañ e-mesk ar vrezhonegerien, e talc'h kont an aveadur-mañ eus dibarelezhioù yezhoniel ar brezhoneg ha nevezadennoù a zo bet degaset gant ar reoliad etrevroadel diwezhañ ISO-8859-15 (Latin 9, anvet ivez Latin 0).

Reizhet eo ar c'hlavier C'HWERTY diouzh ar c'hlavier AZERTY gall. Ober a ra ouzhpenn gant peder stokell nevez **C'H CH Û** ha **Ñ** evit ma c'hellfe an implijour bizskrivañ e brezhoneg en un doare aes ha dre santout.

Evit derc'hel un implij a-feson a-benn skrivañ e galleg, e oa bet miret an teir stokell **C Q** ha **X** nebeut implijet e brezhoneg. Dalc'het eo bet ivez tro da implijout diouzhtu arouezennoù-diforc'h ar galleg **à ç è é** a vez kavet kustum war ar c'hlavier AZERTY.

Diouzh ar reoliad diwezhañ ISO-8859-15 eo ar c'hlavier hag e kinnig ur stokell da bep unan eus an arouezennoù gall nevez **€ œ Œ** ha **ÿ**. Ouzhpenn e ro digor d'an arouezennoù **É æ Æ « » ç** hag ivez da galz arouezennoù all a c'hell servij d'al liesyezherien. Dreist pep tra e ra gant holl arouezennoù-diforc'h ar yezhoù keltiek all, kembraeg, gouezeleg Bro-Iwerzhon ha Bro-Skos, kerneveureg ha manaveg.

Pourchaset eo meziant reizhiad ar c'hlavier evit ar reizhiadoù Windows 2000 ha XP.

Taolennad skritelligoù ar c'hlavier C'HWERTY.

Brezhoneg	Galleg	Saozneg
Achap	Échappement	Escape
Taolennata	Tabulation	Tabulation
Prennañ Pennlizherenn	Verrouillage Majuscule	Caps Lock
Pennlizherenn	Majuscule	Shift
Reol	Contrôle	Control
Erlec'hiañ	Alternatif	Alternate
Souzañ	Retour	Backspace
Enankañ	Entrée	Enter
Arouezenn Erlec'hiañ	Graphique Alternatif	Alternate Graphics
Ensoc'hañ	Insérer	Insert
Dilemel	Supprimer	Delete
Dibenn	Fin	End
Moulañ Skramm	Impression Écran	Print Screen
Arsav Dibuniñ	Arrêt défilement	Scroll Lock
Ehan	Pause	Pause
Span	Attente	Break
Prennañ sifrennoù	Verrouillage Numérique	Numeric Lock
Kewerienn¹ (K1,...)	Fonction (F1, ...)	Function (F1, ...)
Deroù	Origine	Home
Paj. Adreñv	Page précédente	Page up
Paj. A-raok	Page suivante	Page down
Dihun	Réveil	Wake up
Kousk	Veille	Sleep
Lazh	Éteindre	Power off

¹ = Arc'hwel

2. C'hwec'h abeg a-zoare evit cheñch hoc'h AZERTY deut da vezañ kozh.

Gant piv ez aio mat ar c'hlavier-se ? Peseurt gounid gwir e kinnig d'an implijour ?

- **Dic'hoantañ ezhommoù ar vrezhonegerien, da gentañ.**

Kinnig a ra ar c'hlavier C'HWERTY peder stokell diforc'hus **C'H CH Û** ha **Ñ** a zo rekis evit bizskrivañ e brezhoneg en un doare aes ha dre santout. Tu zo da gaout an arouezennoù-diforc'h all eus ar yezh (**ê, û, ...**) gant ma vo implijet stokell varv an tired (**^ " ´ `**) a-raok pouezañ stokell an arouezenn da gemmañ. Evit tapout arouezenn **ê** eus ar ger **kêr** e vez ret pouezañ an div stokell **^** ha **e** an eil war-lerc'h eben da skouer.

Ober a ra ar c'hlavier gant ar brezhoneg peurunvan ha gant ar reoliad etrerannyezhel memes tra. Ne c'hounezo ket ar reoliad skolveuriek hag ar gwenedeg « falhuneg » kalz eus ar pezh a zo degaset gantañ.

Moulet eo bet holl stokelloù arc'hwel ar c'hlavier C'HWERTY e brezhoneg penn-da-benn. N'eo ket ur benveg gwir evit kas war-raok ar brezhoneg hepken, barrek e vo ivez evel just da skoazell ac'hanoc'h a-benn bizskrivañ testennoù a bep seurt gant hoc'h urzhiataer.

- **Kas war well an AZERTY ha dic'hoantañ ar c'hallegerien.**

Tennañ a ra gounid ar c'hlavier C'HWERTY eus ar pezh a vez degaset gant ar reoliad etrevroadel diwezhañ ISO-8859-15 (Latin-9). Mirout a ra ur stokell pe un denesadur d'an arouezennoù **€ œ Œ** ha **ÿ**. Kavet e vez ivez arouezennoù all ISO-8859-1, a oa ankounac'haet gant ar c'hlavier AZERTY, evel **æ Æ Ç** « » **É** da skouer. Alies e vez rekis an holl arouezennoù-mañ evit bizskrivañ e galleg reizh.

Skouerioù gerioù gall gant an ereadur **œ** enno:

Bœuf, cœlome, cœlacanthe, cœliaque, cœur, chœur, foetus, manœuvre, mœurs, nœud, œcuménisme, œdème, œdipien, œil, œillade, œillets, œnologie, œsophage, œuf, œuvre, sœur, vœu, stœchiométrie, ...

Skouerioù² lec'hioù eus Breizh gant an ereadur **œ** enno:

Plœmel, Plœuc-sur-Lié, Plœmeur, Plœren, Le Fœil, Paimbœuf, Bonnœuvre, Hœdic, ...

Skouerioù gerioù gall a orin latin gant an ereadur **æ** enno :

Lætitia, ægosome, cæcum, uræus, æsthésiomètre, cælostas, cæruleum, cæsium, dæmonorops, althæa, cobæa, æschne, æpyornis, et cætera, ...

Krochedigoù **gall** eo an arouezennoù « ha » ha diaes e vo da dapout anezho gant ar c'hlavier AZERTY. Lod eus ar meziantoù, evel ar c'heweriañ testenn *Microsoft Word* da gentañ skouer, a c'hell lakaat ar c'hrochedig gall e-lec'h an arouezenn **"**, krochedig **saoz** pe diverkezenn, met ne ra ket an darn vrasañ eus ar meziantoù an oberiadenn-se.

Ouzhpenn eo pouezus derc'hel soñj, ne vo ket tu da gaout an arouezennoù **É** ha **Ç** gant ar c'hlavier AZERTY kennebeut. A drugarez da reizhadur emlusk an destenn dre ho meziant, e c'hellit tapout an arouezennoù-mañ. Pa vez lec'hiet lizherenn gentañ ar ger e penn-kentañ ur frazenn, da skouer.

² Ne zouj ket an darn vrasañ eus ar pannelloù-hent an ereadur-se !

Implijet eo an arouezenn « gallek kozh » Ÿ gant anvioù piauvel ar c'hêrioù gall pe gant anvioù familh brudet, hepken. Kavet e vez anezhañ e-barzh ar gerioù MOÿ, HAY-LES-ROSES, CROÿ, LOUÿS, Aÿ ... da skouer.

- **Ober a-zoare gant an holl yezhoù keltiek.**

Gallout a rit bizskrivañ end-eeun e pep yezh keltiek gant ar c'hlavier C'HWERTY. Ober a ra gant ar reoliad UNICODE 2.0 evit spisaat bonegoù holl arouezennoù-diforc'h ar yezhoù-mañ.

Dont a ra an arouezennoù arbennik-se gant an darn vrasañ eus ar c'heneliadoù reizhiad boutin a zeu gant Windows 2000 pe XP. Rollet eo an arouezennoù-se da-heul :

Brezhoneg peurunvan

Ââ Êê Ññ Ùù Ûû Üü ' ,

Kerneveg unvan [Ur c'heneliad UNICODE Latin Extended-B a zo ret evit an ÿ. gw. FAQ]

Āā Ēē Īī Ōō Ūū Üü Ūģ

Gouezeleg Bro-Iwerzhon

Áá Éé Íí Óó Úú

Gouezeleg Bro-Iwerzhon kozh [Ur c'heneliad UNICODE Latin-8 a zo ret. gw. FAQ]

Áá Ĕĕ Ćć Ďď Éé Ęę Ħħ Íí Ĺĺ Óó Ğğ Śś Ċċ Úú ſ ſ ı

Gouezeleg Enez-Vanav

Çç

Gouezeleg Bro-Skos

Àà Èè Éé Ìì Òò Óó Ùù

Kembraeg

Àà Áá Ââ Ää Èè Éé Ěě Ìì Íí Îî Ĭï Òò Óó Ôô Öö
Ùù Úú Ûû Üü ðð ǰǰ ǶǶ ǷǷ ǸǸ ǹǹ ẏẏ ẘẘ ẙẙ ẚẚ

Tu zo, hag aes eo da vizskrivañ an holl arouezennoù-se gant ar c'hlavier C'HWERTY. Da skouer e vo posupl kaout an arouezenn iwerzhonat ð dre bouezañ ar stokelloù ` + b an eil war-lerc'h eben, pe c'hoazh an arouezenn kembreat Ƿ dre ^ + w.

Pouezañ war ar memes stokelloù gant ur c'hlavier AZERTY a rafe `b pe ^w !

Ar stokelloù marv *makroñs* ¯ ha *pik a-us* ˘ zo nevez. Gallout a rit bizskrivañ ganto arouezennoù-diforc'h ar c'herneveureg hag ar c'houezeleg kozh.

Skouer testenn e gouezeleg kozh :

“Ó ní gádaid duit é, a Břigíd,” ars’ an ðráčair eile go searð.
Ó n lá sain go dtí an lá indiu tá Cailín na mBřáicre mar ainm
ar éinne a ðíonn “cun é sin déanaim” i n-ionad é ðeic déanta ...

- **Merañ an esaou didroc'hus.**

Posupl e vez ensoc'hañ ur gwenn didroc'hus gant ar c'hlavier C'HWERTY dre bouezañ ar stokelloù « **PENNLI+ARERL+ESAOU** ». Talvoudus eo an oberiadenn-mañ ma fell deoc'h en em asurañ ne vo ket tu troc'hañ un destenn e lec'h m'emañ e wenoù.

Ma'z embannit pajennoù WEB a c'hellfe bezañ lennet adalek un urzhiataer bennak, gant ur c'hefluniadur bennak (ment ar skramm pe ar « merdead » dizanav, keneliadoù erlec'hiañ staliet, ...) e vez talvoudus implijout gwennoù didroc'hus a-raok arouezennoù e-giz ar c'hrochedig » pe an arouezenn poentadur ... a-benn en em asurañ ne vo ket troc'het ar frazenn just a-raok an arouezennoù-mañ.

- **Merañ lod eus ar yezhoù europeat all.**

Ma c'hellit tapout an arouezenn é adalek ur c'hlavier AZERTY, pe tapout peotramant an arouezennoù portugalek õ, ã ha spagnolek ñ, diaes a-walc'h e vo da gaout an arouezennoù tiredet á í ó ú ... hag a zo rekis a-benn skrivañ e yezhoù latin-mañ.

Gant-se e vo pleustrekoc'h ar c'hlavier C'HWERTY evit bizskrivañ e yezhoù a implij lizherennoù gant un tiret lemm enno. Kavet e vez e-mesk anezho meur a yezh latin e-giz ar gallaoueg, ar spagnoleg, an italianeg, ar portugaleg, ar c'hatalaneg, ar galizeg, an okitaneg, ar frioulaneg, met ivez yezhoù alamanek evel an hollandeg, ar frizeg pe al luksembourgeg.

E-barzh an daolennad da heul emañ rollet arouezennoù-diforc'h a c'hell servij evit yezhoù all:

	Stokelloù	Anv	Yezh(où)
Å å	· + A	A ront	Daneg Svedeg Norvegeg Walloneg
Ø ø	· + O	O stanket	Daneg Norvegeg Faeroeg Ligureg
Ð ð	· + D	Eth	Islandeg Faeroeg
Þ þ	· + T	Thorn	Islandeg
Ł ł	· + L	L gevellek	Katalaneg
Ħ ħ	· + H	H stanket	Malteg
Ž ž	· + Z	Z pik a-us	Malteg (Gant ivez c ha g pik a-us)
Í í	~ + I	I tildenn	Greunlandeg
Ū ū	~ + U	U tildenn	Greunlandeg
Ĉ ĉ	^ + C	C kognek	Esperanteg
Ŝ ŝ	^ + S	S kognek	Esperanteg
Ĝ ĝ	^ + G	G kognek	Esperanteg
Ĥ ĥ	^ + H	H kognek	Esperanteg
Ĵ ĵ	^ + J	J kognek	Esperanteg
Ŭ ŭ	· + U	U berr	Esperanteg
Ŋ ŋ	· + N	N tired lemm	Betieg (Kameroun)
Ŷ ŷ	~ + Y	Y tildenn	Toba (Indonesia)

Posupl e vez merañ lod eus ar yezhoù polynesian gant ar stokell *makroñs* ̄.

- Denesaat ouzh an arouezennoù kenwerzhel, skiantel, gresianek ...

Ouzhpenn e vez kinniget gant ar c'hlavier C'HWERTY un doare ez-eeun da vizskrivañ an arouezennoù ispisial ¡ ¸ © ® ¤ ¥ £ a c'hell bezañ talvoudus a-wezhioù.

Kavet e vo ivez an arouezennoù da heul, e c'hell bezañ pouezet en un doare eeun daoust ma n'eo ket bet moulet an darn vrasañ war ar stokelloù, a-benn na vo ket revec'hiet neuz ar c'hlavier :

α β γ δ ε ζ η θ ι κ λ μ ν ξ ο π ρ ς σ τ υ φ χ ψ ω

Γ Δ Θ Λ Ξ Π Σ Φ Ω

± ∓ ∓ × ¼ ½ ¾ ⅓ ⅔ ⅛ ⅜ ⅝ ⅞ ≤ ≥ ≠ ∞

3. FAG - Foar Ar Goulennoù.

- Peseurt pennlizherennoù evit al liesc'hrafoù **ch** ha **c'h** ? **CH/C'H** pe **Ch/C'h** ?

Netra a vez kavet e-barzh al lennerezh breizhat ma'z e vez ret reizhskrivañ pennlizherennoù an divgraf **ch** ha **c'h**, **C'H** ha **CH** pe **C'h** ha **Ch**. Diuzet eo bet kinnig d'an implijour an arouezennoù **CH/C'H** pa vez pouezet ar stokell erlec'hiañ **PENNLIZHERENN** met ivez **C'h/Ch** pa vez pouezet ar stokell erlec'hiañ **ARERL**.

- Perak n'o deus ket al liesc'hrafoù un arouezenn unan e-unan ?

N'eus ket pell zo eo bet spisaet gant ar « c'hoñsorsiom unikod » un divgraf **IJ** (ha **ij**) a vez implijet e hollandeg gw. ar gêr IJmegen, reizhskrivet evel-se war e panneloù-hent, da skouer. Boneg arouezenn-mañ a zo nemetañ - U0132 - ar pezh a dalv n'eo ket stummet eus an div arouezenn I ha J da heul.

Daoust e c'hell kaout spi e vo spisaet liesc'hrafoù ar brezhoneg gant ar c'hoñsorsiom ?

C'hoant hon eus da respont « ket » kentoc'h peogwir eo bet moulet n'eus ket pell zo un notenn a lâar ne vo roet boneg ebet d'al liesc'hrafoù nevez, nemet ma c'hellit reiñ dezho un abeg kendrec'hus a-walc'h.

N'eo ket ar brezhoneg ar yezh nemeti a vez sellet ouzh an notenn-mañ. Kontet e vez yezhoù all, evel ar slovagek, ar c'houezeleg pe ar c'hembraeg dreist-holl, a vez kavet kalz a liesc'hrafoù gant o lizherennegoù. Neuze pa vez pouezet ganeoc'h war stokell **CH** pe **C'H**, meur a arouezenn a vo moulet en ho teuliad.

- Peseurt arouezenn « skrab » a-benn skrivañ al liesgraf **C'H** ?

Meur a arouezenn a zo a-feson evit bizskrivañ « skrab » an arouezenn **C'H**. Diuzet eo bet, e-unan gant alioù Roparz Hemon pe Fañch Kervella da implijout ar verkezenn a-zehoù, stouet a-gleiz, kentoc'h eget ar skrab boutin sonn. Gant-se e vo skrivet **PLOUMANAC'H** kentoc'h eget **PLOUMANAC'H**.

- Daoust eo ret implijout keneliadoù arbennik ?

Evit bizskriñ holl arouezennoù-diforc'h ar gouezeleg pe y « makroñs » ġ ar c'herneveureg unvan, e vo ret implijout keneliadoù keverlec'h UNICODE Latin-8 ha Latin Extended-B.

Kavet e vez meur a unan digoust, posupl eo pellgargañ anezho war internet ha kavet e vez anezho ivez war ar CDROM a zeu gant ar c'hlavier C'HWERTY.

Evit an arouezennoù-diforc'h all, ez eus trawalc'h gant an holl geneliadoù boutin met nevez (Arial, Times New Roman, Verdana, Comics, ...).

<http://czyborra.com/charsets/iso8859.html> <http://www.alanwood.net/unicode/fonts.html>
<http://www.slovo.info/unifonts.htm> http://www.geocities.com/finis_stellae/ng/unicode.html
<http://www.drouizig.org/drouizig/keneliadou/>

- Ar reoliad ISO-8859-15, UNICODE, Internet hag ar c'heverlec'hded mezialtel.

Mont a ra war wel hiziv ar reoliadoù ISO-8859-15 hag UNICODE, ha sur a-walc'h hoc'h eus remerket an dra-se dre implij an arouezenn nevez € : ne vezont ket meret mat gant lod eus ar mezialtoù kozh pe Angled-Saozon.

Spi hon eus e vo barrek, tuchant, an darn vrasañ eus ar mezialtoù a zo implijet er bed da labourat gant an arouezennoù nevez-mañ. Kenstagusted ar stlennoù, a zo tolzennekoc'h-tolzennekañ war internet, a zalc'h eus an dra-se.

Da c'hortoz, ma n'oc'h ket sur eus kozhni aveadurioù stlennegel ho kenskriverien, n'ez eus korvigell strobinnellus anavezet ebet evit skoazell ac'hanoc'h : kavit gwell implijout **EUR** eget **€** pe c'hoazh **oe** eget **œ** h.a.

Se bet lâret, eo barrek an darn vrasañ eus ar mezialtoù burevek da verañ mat gant an arouezennoù nevez-se, skrivadur an teuliad-mañ a zo ar brouenn gentañ.

- Merañ reizhiadoù all, Windows NT4, 95/98/ME, Linux ha MacIntosh ?

Posupl e vefe merañ Linux ha Macintosh. Depant a ra dreist holl mar ez eus kalz a dud da c'houlenn diganimp an dra-se.

Koulskoude n'hon eus ket c'hoant da verañ Windows 95/98 pe Me abalamour e labour a reizhiadoù-mañ gant pajennoù arouez 8e. N'eo ket aes da verañ an ereadurioù C'H ha CH, gant NT4, setu perak n'eo ket veret kennebeut.

4. Geriaoueg teiryezhek ar reizhskrivadur hag ar c'hlavier.

Brezhoneg	Galleg	Saozneg
lizherenn	lettre	letter
niver/niverenn	nombre	number/digit
arouezenn/nod	caractère	character
klavier	clavier	keyboard
stokell	touche	key
stokell arc'hwel/gewerienn	touche de fonction	function key
stokell zu	touche de direction	direction key
stokell badus	touche rémanente	meta key
berradennoù klavier	raccourci clavier	hot key
stokell erlec'hiañ	touche de commutation	meta key
stokell varv	touche morte	dead key

esaou/gwenn	espace	space
tired	accent	accent
arouezenn-diforc'h	diacritique	diacritic
daouboent	tréma	colon
lostig	cédille	cedilla
tired kognek	circonflexe	circumflex
makroñs/tired a-us	macron/tiret en chef	macron
pik a-us	point en chef	dot above
ereadur	ligature	ligature
liesgraf	polygraphe	polygraph
divgraf	digraphe	digraph
tired lemm	aigu	acute
tired boud	grave	grave
skej	virgule	coma
daou bik	deux points	colon
pik	point	full stop/dot/period
tri fik	point de suspension	suspension mark
pik-skejjg	point virgule	semi colon
pik-estlamm	point d'exclamation	exclamation mark
pik-goulenn	point d'interrogation	question mark
mui	plus	plus
tired	tiret	hyphen
tired izel	tiret bas	underscore
lei	moins	minus
lieskementet/gwech	multiplié/fois	time
rannet	divisé	divided by
tildenn/tonnan	tilde	tilde
krochedigoù	guillemets	double quote
merkezenn	cote	quote/quotation mark
krommell	parenthèses	brackets
krommell digeriñ	parenthèse ouvrante	open bracket
krommell serriñ	parenthèse fermante	close bracket
krochedoù	crochets	square brackets
briataennoù	accolades	braces/curlies (left & right)
barrenn a-dreuz	barre oblique	forward slash
barrenn a-dreuz gin	barre oblique inversée	back slash
barrenn a-seizh/a-sonn	barre verticale	vertical bar
diezenn	dièse	hash
« ha » kenwerzhel	esperluette	ampersand
skrab	apostrophe	apostrophe
steredennig	astérisque	asterisk
krogenn	arobe	at sign
zo par da/par	égal	equal
mac'her	exposant	exponent
feuriader	indice	index
dreist da/brasoc'h da	supérieur à	greater than
brasoc'h eget pe bar da	supérieur ou égal	greater than or equal
bihanoc'h eget	inférieur à	less than
bihanoc'h eget pe bar da	inférieur ou égal	less than or equal
disheñvel ouzh	différent de	different from
dre-gant	pourcent	percent
ereadur o/e	e collé dans l'o	o/e ligature
pennlizherenn	majuscule	upper case
lizherenn vunut	minuscule	lower case
lizherenn gentañ	initiale	initial
pennlizherenn	capitale	capital
keneliad/polisenn	police	font
tev	gras	bold
stouet	italique	italic
islinennet	souligné	underlined

Adteul A - Taolennad an arouezennoù-diforc'h.

á	0x00e1	Á	0x00c1	Gouezeleg Kembraeg
é	0x00e9	É	0x00c9	Gouezeleg Kembraeg Skoseg Galleg
í	0x00ed	Í	0x00cd	Gouezeleg Kembraeg
ó	0x00f3	Ó	0x00d3	Gouezeleg Kembraeg Skoseg
ú	0x00fa	Ú	0x00da	Gouezeleg Kembraeg
ý	0x00fd	Ý	0x00dd	Kembraeg
ŵ	0x1e83	Ŵ	0x1e82	Kembraeg
à	0x00e0	À	0x00c0	Kembraeg Skoseg Galleg
è	0x00e8	È	0x00c8	Kembraeg Skoseg Galleg
ì	0x00ec	Ì	0x00cc	Kembraeg Skoseg
ò	0x00f2	Ò	0x00d2	Kembraeg Skoseg
ù	0x00f9	Ù	0x00d9	Brezhoneg Kembraeg Skoseg Galleg
ÿ	0x1ef3	Ỳ	0x1ef2	Kembraeg
ŵ	0x1e81	Ŵ	0x1e80	Kembraeg
â	0x00e2	Â	0x00c2	Brezhoneg Kembraeg Galleg
ê	0x00ea	Ê	0x00ca	Brezhoneg Galleg
î	0x00ee	Î	0x00ce	Kembraeg Galleg
ô	0x00f4	Ô	0x00c4	Kembraeg Galleg
û	0x00fb	Û	0x00db	Kembraeg Galleg
ÿ	0x0177	Ỳ	0x0174	Kembraeg
ŵ	0x0175	Ŵ	0x0176	Kembraeg
ä	0x00e4	Ä	0x00c4	Kembraeg
ë	0x00eb	Ë	0x00cb	Kembraeg Galleg
ï	0x00ef	Ï	0x00cf	Kembraeg Galleg
ö	0x00f6	Ö	0c00d6	Kembraeg
ü	0x00fc	Ü	0x00dc	Brezhoneg Kerneveureg Kembraeg Galleg
ÿ	0x00ff	Ỳ	0x0178	Kembraeg
ŵ	0x1e85	Ŵ	0x1e84	Kembraeg
ā	0x0101	Ā	0x0100	Kerneveureg
ē	0x0113	Ē	0x0112	Kerneveureg
ī	0x012b	Ī	0x012a	Kerneveureg
ō	0x014d	Ō	0x014c	Kerneveureg
ū	0x016b	Ū	0x016a	Kerneveureg
ÿ	0x0233	Ỳ	0x0232	Kerneveureg
ç	0x00e7	Ç	0x00c7	Manaveg Galleg
ñ	0x00f1	Ñ	0x00d1	Brezhoneg
æ	0x00e6	Æ	0x00c6	Galleg
œ	0x0153	Œ	0x0152	Galleg
ḃ	0x1e03	Ḃ	0x1e02	Gouezeleg
ċ	0x010b	Ċ	0x010a	Gouezeleg
ḍ	0x1e0b	Ḍ	0x1e0a	Gouezeleg
ḟ	0x1e1f	Ḟ	0x1e1e	Gouezeleg
ḡ	0x0121	Ḡ	0x0120	Gouezeleg
ḣ	0x1e41	Ḣ	0x1e40	Gouezeleg
ḵ	0x1e57	Ḵ	0x1e56	Gouezeleg
ḥ	0x1e61	Ḥ	0x1e60	Gouezeleg
č	0x1e6b	Č	0x1e6a	Gouezeleg
ɽ	0x027c			Gouezeleg
ɿ	0x017f			Gouezeleg
ɿ̣	0x1e9b			Gouezeleg

Adteul B - Taolennad arouezennoù ar c'hlavier C'HWERTY.

Achap	K1	K2	K3	K4	K5	K6	K7	K8	K9	K10	K11	K12
-------	----	----	----	----	----	----	----	----	----	-----	-----	-----

~	Γ	1	Δ	2	Θ	3	Λ	4	Ε	5	Π	6	Σ	7	Φ	8	Ψ	9	Ç	0	Ω	-	β	+	←
·	&	-	é	'	·	"	#	,	{	([-		è	`	_	\	ç	±	à	@)] =	}	

Taolenn	C'H	α	ω	W	ω	E	ε	R	ρ	T	τ	Y	ψ	U	υ	I	ι	O	œ	P	π	..	¥	*	£
	c'h	C'h	w	w	e	e	€	r	r	t	t	y	u	u	i	i	o	œ	p	p	^	«	/	»	

Prenn Pennli	A	Æ	S	σ	D	δ	F	φ	G	γ	H	η	J	ς	K	κ	L	λ	M	μ	Û	Ⓜ	!	i
	a	æ	s	σ	d	δ	f	φ	g	γ	h	η	j	ς	k	κ	l	λ	m	μ	ù	®	?	ı

Pennli	Q	θ	Z	ζ	X	ξ	C	χ	V	α	N	v	CH	o	Ñ	°	:	©	;	%	Pennlizherenn
	q	<	z	>	x	ξ	c	χ	v	b	n	ch	Ch	ñ	°	:	§	,	%		

Reol	Erl		ArErl	Reol
------	-----	--	-------	------

- C'hwelaozouriezh gwellek evit bizskrivañ testennoù e brezhoneg (stokelloù nevez **C'H**, **CH**, **Ñ** ha **Û**).
- Tikedennerzh penn-da-benn stokelloù kevreizhenn ar c'hlavier e brezhoneg (**Reol**, **Erl**, **ArErl**, **Enankañ**, **Souzañ**, **Ensoc'hañ**, **Arsav Dibuniñ**, ...).
- Enbonegañ an arouezennoù-diforc'h hag an arouezennoù nevez hervez ar reoliad **UNICODE** 16e.
- Klavier **AZERTY** klokaet a-benn laouenaat ezhommoù ar c'hallegerien hag al « latingarourien » (stokelloù **œ**, **œ**, **æ**, **Æ**, **ÿ**, **É**, **Ç**, « », **á**, **í**, **ó**, **ú**, ...).
- Merañ an holl yezhoù keltiek, arouezennoù-diforc'h **ŵ**, **ŷ**, **ā**, **ē**, **ō**, **š** ... ha **ŕ**, **s** ha **r** hirstummet evit ar c'houezeleg kozh.
- Ouzhpenn tra, meur a arouezenn gresianek (**α** **β** ...), kenwerzhel (**€** **¥** ...) ha skiantel (**±** **≤** **≥** **∞** **≠** ...).

Adteul C - Diskrivadenn ar c'hlavier C'HWERTY.

52TA - BZH

REV: A

Date: 21 03, 2003

CHK:

CHK:

APP'D:

Achap										K1		K2		K3		K4		K5		K6		K7		K8		K9		K10		K11		K12		Prenn Siffr Prenn Pennil Arsav Dibun KAD	
1 ~ 2		3 "		4 .		5 (6 -		7 è		8 _		9 ç		0 à		Moulañ Skramm Reizh		Arsav Dibun		Z ^Z Kousk		Ehan Span		7 Deroù		8 ↑		9 Paj. Adreiv		-			
C'H		W		E		R		T		Y		U		I		O		Enankañ		Deroù		Paj. Adreiv		Ehan Span		4 ←		5 =		6 →		+			
Prenn Pennil		A		S		D		F		G		H		J		K		L		M		U		Paj. Araok		1 Dib.		2 ↓		3 Paj. Araok		E n n a k k a ñ			
Reol		Q		Z		X		C		V		B		N		CH		Pennlizherenn		N		A/Erl		Reol		0 Ensoc'han		.		Dil					